

HEKLEV SEVENADUREL



A-dreuz lenn

2



Petra nevez ?

7



Notennoù


20



Herve LATIMIER

**Un temps pour Changer,
Viens, parlons,
osons rêver...**

gant Pape François,
troet e galleg gant
Austen Ivereigh,
Flammarion, 2020,
224 fajenn, 16,90€



El levr-mañ e kaver darn eus ar prederiadennoù bet kinniget gant ar Pab Frañsez en e zaou lizher-meur *Laudato Si* (AL niv. 414) ha *Fratelli tutti* (AL niv. 448). Diazezet eo ar skrid war eskemmoù bet etre ar Pab hag Austen Ivereigh, kelaouenner katolik saoz. Penaos e c'heller tennañ hon mad eus enkadenn ar c'hovid ? Un enkadenn bedel

evel honnezh a zle reiñ tro d'en em soñjal ha, dreist-holl, da cheñch an traoù ma ne dremener ket hebiou... Setu danvez an eskemmoù. Goude ur rakskrid gant an aotrou Benoist de Sinety, bet vikel-vras arc'heskopti Pariz. En oberenn e kaver teir lodenn glasel a-walc'h pa gaser ur preder war un enkadenn pe un degouezh a bouez : « *Un temps*

pour voir », « *Un temps pour choisir* » hag « *Un temps pour agir* ». Rannoù berr a ya d'ober pep lodenn, pep hini gouestlet d'ur brederiadenn, d'ur mennoz pe d'un danvez. Aesoc'h a se lenn al levr. Evel kloazadur ez eus ur pennad gant Austen Ivereigh o tisplegañ penaos eo bet savet an oberenn hag un toullad notennoù.

Ma ne gaver ket mennozhioù nevez e-leizh e pouez kalz ar Pab war reoù zo. Reiñ skouerioù tennet eus e vuhez personel diwar-benn enkadennoù bet bevet gantañ hag ar pezh en deus tennet diouto rak « *Entrer en crise, c'est passer au crible. [...] La question est de savoir si tu vas sortir de cette crise et si oui, comment. on ne sort jamais indemne d'une crise; c'est une règle fondamentale. Si tu t'en sors, tu en ressorts meilleur ou pire, mais jamais comme avant* » (p.11). Ret eo profitañ eus ar pezh a vev ar bed bremañ evit e wellaat eta. E-touez an traoù a adkaver : al liamm etre ar bed krouet hag an denelezh a zo ezel anezhañ ; mennozh an ekologiezh “klok” ; n'eo ket echu ar grouidigezh, un ober dinamek eo ; roll mab ha merc'h-den (« *Non, nous sommes acteurs, nous sommes*

- si je puis m'exprimer ainsi - des co-créateurs » (p.15) ; n'hell hini ebet ac'hanomp bevañ hep ar re all ; sellet ouzh ar bed adalek “trobarzhioù” ar gevredigezh ha kemer harp war oc'h ijin hag o nerzh evit kemm an traoù... Kavout a reer ivez prederiadennoù war ar gevredigezh, ar politikerezh hag an ekonomiezh (« [...] *l'inégalité délirante entre des milliards de personnes dans une extrême indigence et le 1% le plus riche possédant la moitié des richesses financières du monde* » [p.99] ; « *Tout cela implique d'avoir des objectifs communs pour le développement humain plutôt que de partir de la fausse hypothèse, de l'infâme théorie du “ruissellement” selon laquelle une économie en croissance nous rendra tous plus riches* » [p.197]). Lennit ar pajennoù 176 ha 177 diwar-benn ar riskl da welet an demokratelezhioù o vezañ debret gant an diktatouriezh abalamour d'a bobleouriezh ; diwar-benn fazi bras ar re a lâr difenn “ur sevenadur kristen”. Gouzout kaout doujañs evit an disheñvelderioù hag ar sevenadurioù, eskemm, chom hep krediñ kaout ar “wirionez” ; klask bepred un diskoulm en

tu-hont d'ar c'hontroliezhioù...
Dibosupl e vefe menegiñ pep
tra. Pinvidik eo al levr, danvez
d'en em soñjal e-leizh ennañ.


Evel-just n'eo ket ar mennozhioù-
se re ar Pab Frañsez nemetken,
eüruzamant, met pouezus-kenañ
eo gwelet anezho displeget
gantañ.

Evel-just e vo hegazet kalz
lennerien gant an daveoù relijiel

**Les épreuves de la
vie, Comprendre
autrement les Français,**
gant Pierre Rosanvallon,
Le Seuil, 2021,
216 pajenn, 19€

Kaoz zo bet eus pemp levr
bet savet gant Pierre Rosanval-
lon el *Liamm* (so. niv. 346 ;
376 ; 393 ; 418 ; 436) c'hoazh.
Anavezet-kaer eo an den, isto-
rour ha sokiologour ; bet karget
eus ar gador « Istor modern ha
kempred ar fed politikel » e
skolaj Frañs (*Collège de France*)
betek 2018 ; rener a studioù e
Sol ar Studioù uhel e Skiantoù
Sokial (*Ecole des Hauts Etudes
en Sciences Sociales - EHESS*),
krouer an “atalier a breder” « *La*

niverus hag ar sell war dachen-
noù zo evel an diforc'hañ pe an
demografiezh da skouer. Diaes
goulenn digant ar Pab chom
hep bezañ ar Pab, neketa...
Kemeromp harp war e gomzoù
kentoc'h, kristenien pe nann-
kristenien ; implijomp anezho...



République des idées »... An
demokratelezh e Frañs eo e dan-
vez studi pennañ.

Unan eus perzhioù an dastu-
mad eo e kaver el levr un arnod-
skrid pennañ ha goude ur rann
anvet « *Rebonds et explora-
tions* » ma kaver pennadoù a
gloka al lodenn gentañ pe a ro
ur sell disheñvel. Pevar fennad
amañ : « *L'épreuve de l'humilia-
tion* » gant Gloria Orrigi ; « *Les
voies d'accès à la subjectivité* »
gant Nicolas Duvoux ; « *À*

l'épreuve des émotions : protester au XIX^e siècle » gant Emmanuel Fureix ha « *Redonner voix aux émotions, littérature et cultures ouvrières* » gant Aurélie Adler.

Mennozh diazez al levr eo n'heller ket ken displegañ an emsaviou sokial a-vremañ gant an doareoù klasel : frammoù hollek ar gevredigezh, rannoù etre an tiriadoù, sontadegoù ha statistikoù... Ret eo sellet ouzh an doare ma vez bevet, santet, gouzañvet an traoù gant an dud. Disheñvel en ur sell "objektivel" ha disheñvel evit pep hini. Goude ur ger digeriñ « *Les français à l'épreuve* », e kaver pevar chabistr, « *L'épreuve du mépris* » ; « *L'épreuve de l'injustice* » ; « *L'épreuve de la discrimination* » ; « *L'épreuve de l'incertitude* » hag ur c'hlozadur, « *Les voies nouvelles de l'émancipation* ».

E fin an XX^{vet} kantved e weler bed al labour o kemm da vat, pouez ar sindikadoù hag ar strolladoù politikel a framme ar gevredigezh, o koazhañ buan, Ne sav ket ar stourmoù na war memes tachenoù nag e memes doareoù. Kavet e vez aliesoc'h-aliesañ stourmoù o vodañ d'ur mare tud eus rummadoù disheñ-

vel met liammet gant memes trubuilh, memes santadoù, memes fulor, d'ur mare ma seblant ur bern traoù en arvar ha dazont hor spesad zoken. P. 14 e lenner : « *Ce sont là des façons de produire du collectif sur d'autres modes que ceux de l'identité d'appartenance qui s'appuyaient, eux, sur des types d'organisations permanentes dont les syndicats étaient l'archétype sociologique et la figure institutionnalisée. Ce sont là les objets constitutifs du commun qui se trouvent en conséquence redéfinis, allant bien au-delà de la notion d'intérêt [...]* »

Kavet e vez alies meneg ha dielfennadur emsavadeg ar Jiletennoù Melen en oberenn (s.o. p. 48 er c'hentañ chabistr ha p. 75 en eil).


Ur meizad en deus ur pouez bras el levr ha peurgetket abalamour d'e zarempredoù gant an demokratelezh : an hiniennelouriezh a esparded. P. 71 e c'heller lenn : « *Dans la démocratie comme régime politique lié à l'individualisme d'universalité, le suffrage universel signifiait que chacun détenait une parcelle de souveraineté égale à celle des autres. Dans la démo-*

cratie comme forme sociale de de l'individualisme de singularité, il y a l'aspiration à être important aux yeux d'autrui, à être unique. il y a la formulation implicite d'un droit égal pour chacun à être considéré comme une star, un expert ou un artiste ; à avoir ses idées ou ses jugements pris en compte, reconnus comme ayant une valeur. »

Un difi bras-kenañ evit reiñ
ullañs nevez d'an demokratelezh
ha kavout doareoù nevez hep
skarzhañ an demokratelezh a
zileuridi. Ne vo ket aes kavout
an hent mat. Ha koulskoude ez
eo pouezus-meurbet rak ma ne
gaver ket ez eus ur riskl bras e
tiwanfe un doare diktatouriezh
gant ul *lider maximo* o tont da
vezañ ar “bobl enkorfet”. P. 87 :


« [...] Marx avait été le premier à décrire les ressorts de la constitution du populisme comme élévation d'un peuple virtuel en sujet politique. Lorsque la réalité sociale vécue apparaît confuse, irreprésentable, la tentation se fait en effet jour de transférer la figure introuvable d'un peuple-roi dans son double de chef-peuple. »

Ur wech ouzhpenn e tigor
Pierre Rosanvallon hentoù evit
ar preder. Kinnig a ra amañ un
doare disheñvel diouzh an hini
boas da zielfennañ ar gevredigezh.
Gant ma sikouro da
gavout stummoù nevez a
sikourfe an demokratelezh da
chom bev...



**Magali BARON,
Herve LATIMIER,
Emmanuel PASTORI &
Malo BOUËSSEL du BOURG**

Zadbora,
gant Jerom Olivry,
Al Liamm,
304 fajenn, 14€



E 2019 e oa aet priz Frañs 3 gant Jerom Olivry evit e romant kentañ *Ouzh skleur an noz*. Ul levr dibar a-walc’h e bed ar brezhoneg e oa, etre enklask polis, romant du hag istor sunerien-wad. Ken dic’hortoz all eo an eil, a bled gant ar rummad “fantazi gouronel” (*heroic fantasy*). Gouzout a reer c’hoazh pegen donezonet eo ar

skrivagner evit krouiñ ur bed gant e lezennoù dezhañ e-unan, kenkoulz hag evit terriñ anezhe pa vez ezhomm.

Drantoc’h evit an hini kentañ eo ar romant-mañ, ha bev-birvidik e chom ijin puilh an aozer. Ouzhpenn boudiged, morganezed, erevent, e kaver tudennoù dibar, spesadoù loened dianav, lec’hioù ijinnet penn-da-benn ;

displegadennoù faltazius ha tresadennoù gant Christian Goin-din a laka al lennerien da “zes-kiñ” kalz war o divout. Bamet e vezer gant ar blijadur en dez an aozer o weladenniñ “an tu all”, gant e vousfent ivez, a zeu da gempouezañ an ton harozus. Bez’ ez eus “fantazi” gwir er romant, na zouj ket avat gwech ha gwech all ober al lu eus siriusted ar rummad-se.

Kontañ a ra istor ar blanedenn Zadhora, ma rene gwechall majed c’halloudus. Lazhet int bet holl – pe dost – gant Kaheg, ur seurt ramz eus ur ouenn dianav, deuet da vezañ roue Liesi. Sed aze unan eus neudennoù an itrik : ha dont a ray en-dro an hudouriezh, bet berzet ha skarzhet, daoust ma ’z a d’ober anien ha buhez an holl voutoù ? Pledañ a ra an aozer gant an tem-se, a zo klasel a-walc’h, en un doare soutil ha barzhoniel.

Estreget planedenn Kaheg a vez kontet avat : hini Charlez, ur seurt beleg meur a laka e holl nerzh da reiñ meuleudi da Gaheg ; hini To’Mhaz, ur c’horra glask mont pelloc’h evit re e bobl, o krouiñ delwennoù bev. Tudennoù all zo ivez : Magdalena, Tamara, Birvig, Bukius...

Met hini ebet anezhe n’eo evit gwir ar pezh a seblant bezañ. Kement-se a laka an itrik da vont war-raok, hag a zalc’h spe-red al lennerien war evezh : pep hini a rank mont da furchal en e istor dezhañ e-unan, gouzout piv eo ha piv en deus c’hoant da vezañ. Rak ur goulenn all a vez savet gant al levr : daoust ha rediet e vezer da seveniñ ar pezh a zo skrivet ?

Savet en un doare ampart eo ar steuñvenn, ha ne gaver ket hir e amzer a-hed an 300 pajenn. Mestroniet mat eo hentoù kroaz-digroaz an tudennoù, ha dalc’het mat ar c’hevrin. Maget e vez hemañ gant titl ar pennadoù ivez : « Bloavezh an Heol-Splann », « Bloavezh ar Wezenn-Kantvedel »... Dre ma ne ouier ket pegoulz e c’hoarvez an traoù danevellet eo ret divinout tamm-ha-tamm.

Desachet e vez evezh al lenner gant an neudenn bolitikel ivez, a zo soutil a-walc’h. N’hellfer ket lâret e vefe “drouk” Kaheg, na “jentil” ar vajer ; piaouet o doa ar re-mañ an hudouriezh evit kreskiñ o galloud dezhe o-unan ; hennezh en doa klasket avat lakaat an holl da vezañ ingal.

E stil ar romantoù bras eus ar rummad-se ez echu al levr-mañ gant ur brezel, ma vez ret da bep hini dibab e du. Diskuliet e vez neuze istor hag anien an tudennoù ; met ne zeu ket an ton da vezañ pompadus evit kelo-se, ha pa vefe plegennoù skrijus, pe boudoù meurdeus o tont war wel, rak c'hoarzhet e vez kalzik dres d'an ampoent-se. Pa vez anv eus tonkadur pe eus diouganoù e vez gant ur seurt mousfent yac'h, pa 'z eus anv ivez

eus choaz hag eus c'hoant an tudennoù.

Gwall zisheñvel eo neuze ar romant-mañ diouzh hini kentañ Jerom Olivry, met ken plijus eo, mestroniet gwelloc'h zoken. Kavet em eus eo fresk ha joaius, don a-walc'h a-fet preder, puilh a-fet ijin, ha skrivet gant plijadur vras. Evit doare en deus kavet an aozer ur stumm all a junt dezhañ ; marteze a-walc'h e ouio c'hoazh sourpren al lenne-rien ar wech a zeu !

MB

**Beajour ar goañv /
Le voyageur de l'hiver,**
gant Roparz Hemon,
An Alarc'h Embannadurioù
56 pajenn, 6,50€



Perak embann e div yezh ? Evit reiñ da dañva d'an holl, brezhonegerien pe get, unan eus bravañ danevell Roparz Hemon. *Beajour ar goañv* a voe embannet evit ar wech kentañ war ar gelaouenn *Gwalarn*, niverenn 159, e 1943. Adkavout a reer an danevell-se en torkad *War Ribl*

an Hent, bet embannet gant *Al Liamm* e 1971. E 1983 eo e voe embannet en he stumm divyezhek gant *Mouladurioù Hor Yezh*, dindan renerezh Per Denez, hag a gave dezhañ, gouez d'e bennad kinnig, e oa en danevell-se edo arz Roparz Hemon en e wellañ. Un hir a

veaj, neuze, kent na dizhfe *Beajour ar goañv* un trede nevezamzer gant *An Alarc'h embannadurioù*, dindan e lifre divyezhek adarre, gant un nebeud notennoù diwar-benn an aozer e fin al levr, met hep pennad kinnig ebet.

Ne baot ket an darvoudoù e-ser *Beajour ar goañv*. Un den en em gav en un ostaleri e-kichen ur c'houblad amourouzien yaouank a gomz a vouezh izel. Morse ne doull kaoz ganto, daoust m'eo fromet gant o

c'harantez. Antronoz ez a da welout ur mignon mat hag e wreg un tammig pelloc'h er vro. Ankeniet e hañval bezañ ar re-se abalamour d'o merc'h, hag a zlefe bezañ er gêr. Tra ken. E-lerc'h darvoudoù splann ha displegadurioù sklêrijennus, ez eo dre arlivioù an aergelc'hioù e santer, e tiviner, hag e vezer heñchet tamm-ha-tamm war-zu ar wirionez. Ul labour soutil hag hollgaer, evit lavarout gwir.

MbdB

Gwenn, pemzek vloaz...,
gant Mai Ewen,
Keit Vimp Bev,
94 pajenn, 8€



Gwenn hag he mignonez Janis, liseadezed yaouank anezho, a zo echu ganto bed glan ha gwarezet ar vugaleaj. Diaes an traoù er gêr. An tad a zo erru drouk. Skeiñ a ra gant e wreg. Janis, plac'h teñval he c'hroc'henn, he deus bet kudennoù gant gouennelourien c'hlep war


hent ar skol. Goulennoù don a zeu war-c'horre. Frankiz, karantez, talvoudegezh ur vuhez... Tapout a ra Gwenn chom en he flomm a-drugarez d'un toullad tud damantus ha karantezus war he zro. Tamm-ha-tamm e teu da gompren ar sekred a vez kon-tammet gantañ an darempredoù

etre he zad hag he mamm, hag
hent kildroennek ar pardon er
c'houblad. Kalz temoù kreñv
neuze, hag a c'hellfe treiñ da
glichedoù mil ananvezet,

paneve kizidigezh Mai Ewen,
hag a oar diskouez ar plegennoù
en o c'hemplezhded, gant arli-
vioù he fluenn dener.

MbdB

Jarl Priel,
Va zammig buhez
Va buhez e Rusia
Amañ hag a-hont,
An Alarc'h Embannadurioù
564 fajenn, 20€



Perak adembann, e stumm ur
pikol levr, an teir levrenn a ya
d'ober danevell vuhez Jarl Priel
(1885-1965) ? Diaesoc'h-diae-
sañ e oa kavout an div levrenn
ziwezhañ, met ouzhpenn zo,
evel-just. Alies e vez graet eus
an teir levrenn-se mestr-oberenn
Jarl Priel. Embannet e oant bet
etre 1954 ha 1957 gant *Al
Liamm* diwar atiz Ronan Huon.

Gwir eo ez eo souezhus ha
dibar buhez Charles Tremel,
alias Jarl Priel. El levrenn
gentañ e kont e vugaleaj e Bro-
Dreger, e Priel. Livañ a ra an
dud vunut hag ar gevredigezh e
deroù an XX^{vet} kantved, pa veze
c'hoazh hollvrezhonek ar vuhez
war ar maez. Dedennus eo
e-keñver an istor hag ar

sokiologiezh hag e-keñver spe-
red ar yezh d'ar mare-se. Gant
mil ha kant tro-lavar livus e vez
intret e zezrevell, lod bet sunet
en hengoun, lod all bet ijinet
war ar prim, diouzh tro spered e
gorn-bro. Ur marvailher touet
zo eus Jarl Priel. Meskañ a ra an
istor bihan hag an istor bras gant
fent ha from, a-drugarez d'ur
bluenn lemm ha frev.

En eil levrenn ez ambrouger
an aozer e Rusia, a-raok an
Dispac'h, ma voe mestr-skol
da-heul e wreg. En trede levrenn,
goude bezañ bet jubennour e
Polonia hag Aljeria, ez adkaver
Jarl Priel e Pariz, ma voe
sekretour Charles Dullin ha tost
da Jouvett. Dedennus-kenañ eo
al lodenn-se, d'ur mare ma oa


lusket ha renevezet bed ar c'hoariva gant Dullin, Jouvett, Baty, Pitoëff. Skrivagner galleg e teuas Jarl Priel da vezañ d'ar c'houlz-se. Sevel a reas penna-doù a bep seurt, pezhioù-c'hoari, romantoù, troidigezhioù (Gogol, Bounine, Nabokov, Babel)... Dre ma oa fall put e yec'hed e tivizas dont en-dro d'e vro c'henidik, m'en em ouestlas d'ar c'hoariva, evel komedian ha leurenner, d'ar fiñvskeudenne-rezh (*Salaun ar Foll*, dindan renererezh Herri Caouissin), ha d'ar skrivañ. E 1942 eo e savas e oberenn gentañ e brezhoneg : *An dakenn dour*, ur pezh-c'hoari berr a-walc'h ha fentus, goulennet gant ar Bleun-Brug. Displeget e voe e Landreger. Diwar neuze e savas skridoù fonnus a-walc'h e brezhoneg war-eeun, pe o treiñ e brezhoneg oberennoù bet savet gantañ e galleg a-ziagent, evel e romant *An Teirgwern Pembroke*, pe e bezh-c'hoari *Tri devezhour evit an eost*.

Talvezout a ra ar boan lenn hag adlenn Jarl Priel, neuze. Ur gwir skrivagner ! Bouetet eo e oberenn gant mammennoù disheñvel-krenn. Met diwar ar skiant en doa dastumet a-hed e vuhez e Rusia, e Pariz hag e

Priel, e kinnig deomp ur sintezenn hep he far eus an hengoun hag eus ar vodernelezh, eus ar yezh poblel hag eus ar yezh klassesel. Kempouezet eo e wriziennoù e Bro-Dreger gant e veajoù er bed bras. Un troc'had mat a hent neuze, ken en egor, ken en amzer, e-ser ur den dioutañ e-unan.

MbdB

Dremmvro amspis,
gant Peter Stamm,
brezhoneg gant
Kristian Braz,
Al Liamm,
156 pajenn, 12€



E Bro-Norvegia e c'hoarvez an istor, e biz ar vro evit bezañ resisoc'h, en ur porzhig diamen. Bro ar Samied an hini eo, met estreget Samied a zo o vevañ er gêrig-mañ. Ul labouradeg pesked a zo, oc'h implijout tud ar vro, hag ur bern tud eus broioù all a dremen evit degas o fesked.

Maltouterez eo Kathrine, an harozez. Dre he labour e vez o kejañ ordin gant ar besketaerien. Floderezh a zo, evel e-barzh n'eus forzh peseurt porzh pe kazi. Ensellout a ra pizh ar bagoù evit gwiriekat ne vez ket traoù difennet e-barzh.

He buhez-pad he deus bevet Kathrine er porzhig. Erruet eo skuizh gant he buhez. He labour, he buhez, an deñvalijenn a zo o ren war ar vro c'hwec'h miz ar bloaz, pep tra zo deuet da vezañ torr-penn eviti.

Ur bugel eizh vloaz he deus, met gwelloc'h e kav hemañ bevañ gant e vamm-gozh eget gant e vamm.

Un devezh neuze e ra he soñj Kathrine da vont da adkavout Christian, un Danad a oa bet o labourat er porzh evit ur mare. Darempredoù o deus c'hoazh dre ar rouedad. Kuitaat a ra pep tra, familh, gwaz, labour hag all evit mont d'e welet. Ur plac'h dieub a fell dezhi bezañ adarre marteze ? E-kerzh ar veaj-mañ e kejo gant ur bern tud disheñvel, hag e prederio kalz diwar-benn ar ster e fell reiñ d'he buhez.

Ul levr plijus eo. An istor n'eo ket divoutin, met lakaat a ra al lenner(ez) da brederiañ. Pep den pe kazi a zo oc'h en em c'houlenn diwar-benn ster ar vuhez, an traoù a zo bet c'hwitet, an traoù a vije bet gwelloc'h ober pe get... ar goulennoù-mañ


a zo framm al levr, ha setu ar pezh a lak anezhañ da vezañ talvoudus.

Skrivet eo al levr en ur yezh eeun. Setu neuze un dra ouzhpenn a bouez. Ma 'z oc'h tud o kregiñ da lenn e brezhoneg, hag o klask ur skrid evit tud gour, setu un oberenn graet evidoc'h.

Ma anavezit tud o deus ul live dereat met ne gredont ket lenn ul levr a-bezh, setu ur prof a-feson. Ur mailh war ar brezhoneg oc'h ? Lennit al levr-mañ ivez ! Kavet e vo e-barzh boued-spered evidoc'h ivez !

EP

**Pascal Jaouen, Ma hent /
Mon chemin Glazig,**
testenn gant
Marie-Laure Dubois,
luc'hskeudennoù gant
Bernard Galeron,
Coop Breizh,
145 pajenn, 39€



Pascal Jaouen, diwar skouer Roparz Hemon war dachenn al lennegezh pe Alan Stivell war hini ar sonerezh, en deus renevezet broderezh Breizh. Gouestlet en deus e vuhez d'ar gened, c'hoant gantañ da lakaat braventezh Breizh da greskiñ. Ha berzh en deus graet ! Pa seller ouzh talennoù nes¹ Bernard Galeron e chomer bamet gant ar c'hamahuiou² glas sked-disket, gant al livioù flamm, gant pervezhded al labour-dorn,

1 Talenn nes : luc'hskeudenn graet tost-tre ouzh ar patrom.

2 Kamahu : camaïeu.

gant modernelezh an tresadennoù, intret gant un doujañs don evit an hengoun... Ur splujadenn vlizus e froud ar gaerded eo, hon laka da zisoñjal pasianted ha sioulded ul labour ramzel. Ar gorfkenn lin glas, da skouer, tennet eus an dastumad 2010, a zo ur gwir voem.

Kontañ a ra Marie-Laure Dubois buhez ul liorzher uvel eus Kemper, deuet da vezañ ur broder brudet e bed an uhelwrierezh, bet savet gantañ ur skol broderezh ken brudet all. E-ser Pascal Jaouen e valeomp eus un diskouezadeg d'eben,

betek an dibun gizioù diwezhañ e Kemper, p'en deus divizet an arzour kuitaat al leurenn ha fiziañ e skol broderezh e Yann Lagoutte, unan eus e skolidi donezonetañ. *Ma hent Glazig* a rent enor d'un den difaezhus. Pascal Jaouen a oar c'hwezhañ speredelezh an hengoun e furmoù kempred. Fellout a ra dezhañ tizhout ur gened diamzerel en ur dreuzkas skiant-prenet ar broderezh.

Ur gerig c'hoazh a zivout pennad diwezhañ al levr. Gouestlet eo da genlabourioù

frouezhus gant ar bed armerzhel : tikedennoù evit Strilherezh ar Mein-hir, porrastelloù evit an embregerezh Cadiou, freskennoù moger evit ul leti Ibis. Awenet int gant skiant ar broderezh hag ijin an arzour. Diskouez a reont e c'hell kenseniñ bed an embregerezh gant bed ar sevenadur. Ur gentel vrav.

MbdB

Pirc'hirin ar menez,
gant Gunnar Gunnarsson,
brezhoneg gant
Pierrette Kermaol,
Embannadurioù Aber,
80 pajenn, 11€



Embannet e voe stumm orin *Pirc'hirin ar menez* e daneg, e 1936. Gouarnet e oa Island gant Danmark c'hoazh. Adembannet e voe al levr en islandeg da c'houde. Rak unan eus skriva-gnerien veur Island eo Gunnar Gunnarsson.

« Un oberenn verr a c'hell bezañ un oberenn veur, » a skriv

Pierrette Kermaol, an droourez, en he goudeskrid. Gwir a lavar. *Geotenn ar Werc'hez, An dour en-dro d'an inizi*, pe *Beajour ar goañv* a zegas deomp prouennoù kendrec'hus...

Benedikt eo a zo pirc'hirin ar menez... Un titl a verk un holc'h¹ kevrinel. Petra a ro he saour d'ar
1 Holc'h : *quête*.

vuhez ? Un den simpl eo Benedikt. Simpl ha brokus. Lakaat a ra e vuhez en arvar evit ar re all. Mont a ra dre ar menezioù, gant e gi hag e vouc'h, evit adkavout an deñved n'o deus ket heuliet o zropellad pa oa poent diskenn d'an draoñienn, war glask goudor, e fin an diskaramzer. Evel-se e kav Benedikt e eurvad. « Kerzhout e-unan, dre an egor divent-se, sed a oa e vuhez, ster e vuhez. »

Soñjal a reer e paraboleenn an dañvad dianket evel-just, pe en aviel Mark kenkoulz all : « An neb a venno saveteiñ e vuhez, he c'hollo, met an neb a gollo e vuhez en abeg din-me ha d'ar c'heloù mat, he saveteo. » Met n'eus meneg resis ebet eus an aviel en oberenn. Kentidikoc'h eo he zalvoudegezh. Pedet eur da genlodañ buhez hag ergerzhadenn Benedikt, un den tost d'an natur, tost ouzh al loened. Un den kig hag eskern a vourr oc'h evañ kafe goude bezañ stourmet a-lazh-korf gant an erc'h. Ur paotr dioutañ e-unan, mennet kaer, aheurtet zoken. Un den a zibab e hent diouzh grad e volonteiz divrall. « Ar gerzhadenn-mañ a oa evel ur varzhoneg hollgaer desket dindan eñvor hag a vane en ho kwad. »


Darempredoù Benedikt gant e loened kenveajourien a zo brav, en tu-hont d'ar gerioù. Un doujañs kreñv a ziskouezont an eil re evit ar re all, pep hini dre e ouenn zibar ha dreistdiraez.

N'eo ket war-lerc'h an arc'hant nag an istim emañ Benedikt o redek. Heuliañ a ra ur seurt galv diabarzh, dre vondoug, hag evel-se e kav e frankiz ha ster e vuhez. Ne vev ket er-maez eus ar gumuniezh evit kelo. Deuet mat eo gant an holl zoken. Met eno n'emañ ket an dalc'h.

N'eus nemet dodenn an treuzkas etre Benedikt kozh ha Benedikt yaouank am eus kavet un tammig artifisiel e fin al levr. A-hend-all, na brav dispenn roudoù pirc'hirin ar menez !

MbdB

**Marcel Cachin, Un Breton
émancipé dans les
tourments du XX^e
Siècle, 1869-1958,**
gant Georges Cadiou,
Yoran embanner,
399 pajenn, 16€



Un oberenn a-bouez eo levr Georges Cadiou. Dedennus-kenañ, kentelius zoken rak kavout a reer ennañ ur bern titouroù a c'hell pe kadarnaat ha klokaat traoù a oar al lenner dija pe degas traoù nevez dezhañ. Pouezus eo lenn an titl en e bezh war ar bajenn ziabarzhañ : « *dans les tourments du XX^e siècle* ». Liammet-start eo istor personel Marcel Cachin diouzh istor an emsav komunour e Frañs ha war an dachenn etrevroadel abaoe kendalc'h Tours an SFIO e 1920. Ne oa ket posupl lec'hiañ e vuhez stourmer ouzh emdroadur ar bed komunour betek marv Jozef Stalin e 1953 ha danevell Nikita C'hrouchtchov e 1956. Aet eo Cachin da Anaon daou vloaz war-lerc'h ha n'ouzer netra diwar-benn e soñj war an darvoud divent-se (p.358).

Ur bersonelezh forc'hellek eo hini Marcel Cachin gant tuoù

dreist ha tuoù spontus. Setu pezh a c'heller lenn (p.365) diwar-benn ar pezh a skrivas Philippe Robrieux en e *Histoire intérieure du Parti communiste* : « *Après avoir noté la gentillesse naturelle de Cachin, sa culture, son goût pour les arts (surtout la peinture), la sympathie qu'il inspirait au-delà même de la sphère communiste, Robrieux écrit : "Reste à comprendre comment un tel homme a pu devenir stalinien."* » Un diskoulm a vez kinniget, keñveriañ gant "mont e relijion" : « *La dimension religieuse les [an dud eveltañ] aide alors à se justifier, comme ils le peuvent, dans le secret de leur conscience.* » Breizhad kar-e-vro (chabistr 18) hag e yezh (pp.316-318 kinnig lezenn Hervé-Cachin e 1947), enebour kalet an drevadennou-riezh ha den barrek da asantiñ da

holl dibaboù ar C’homintern ha da brosezoù Moskov...

25 chabistr a gaver el levr, pep hini titouret mat gant ur bern arroudennoù (spontus a-wechoù). Ur gwir feilheton pa weler pegen buan e c’hell tud zo cheñch emzalc’h (Jules Guesde Ministr a Stad e miz Eost 1914 betek 1916, da skouer, p.69) Daveoù resis e-leizh ha skeudennoù. E fin al levr e kaver tri fezh-stag dedennus (« *Les 21 conditions d’adhésion à la Troisième internationale* », « *War sao ! Debout pour l’émancipation et pour l’union de tous les Bretons !* (niv 1, 1937) », « *La grandeur de l’homme communiste* », pennad bet skrivet gant Cachin e 1950) hag ul levrennadur fonnus (17

pajenn). Ul labour hir hag aketus eta.

P.356 er rann « *Le bonheur communiste* », em eus lennet ur frazenn hag he deus degaset soñj din eus traoù bet bevet e “gouriz ruz” Pariz ha klevet gant tontoned din : « *Cachin a connu ce monde où l’on pouvait “vivre communiste” dans une république démocratique bourgeoise, comme on disait alors, et capitaliste ! Sans les inconvénients du “socialisme réel”.* » Un dislavar gwir met, marteze, danvez preder evit stourmerien an amzer-vremañ.

Ar gwellañ stumm da dañva holl binvidigezhioù al levr eo lenn anezhañ, neketa.

HL

**La Presse bretonne dans
la collaboration
1940-1944,**
gant Georges Cadiou,
Yoran embanner,
223 fajenn, 14€

En un doare, e kloka an oberenn-mañ levr Alan Le Cloarec (AL niv 456). Ur sell

pizh war ur prantad resis hag un danvez resis. En e raklavar e skriv Georges Cadiou bezañ bet



souezhet (« *Je me demande pourquoi.* ») gant ar fed ne vefe ket bet studiet, pe dost, plas an enepyuzevouriezh (« *antisémitisme de combat* » emezañ) en div gelaouenn bemdeziek Breizh (*La Dépêche* ha *Ouest-Eclair*). Unan eus an traoù pouezus a laka war wel gant e studiaden. Reiñ a ra ivez titouroù e-leizh war danvezioù all : azeulerezh e-keñver Pétain, enepkomunouriezh, splannoc’h c’hoazh goude miz Even 1941 pa dagas Hitler an Unvaniezh Soviedel, ha mesket alies gant an enepyuzevouriezh (« *les judéobolchéviques* »), enebiezh e-keñver Breizh-Veur hag ar Stadoù-Unanet, e-keñver ar rezistañs ivez evel-just, komzoù flour diwar-benn ar sistem nazi gwelet evel ur skouer, skoazell dibleg da armeoù ar Stad Alaman betek miz Gouere 1944 (!) ha kement a grafoù all. Lennet en deus pizh an div gelaouenn meneget a-us ha taolet ur sell ivez war *La Bretagne*, ar gelaouenn bemdeziek bet krouet gant Yann Fouere e 1941. Bet eo bet Yann Fouere rener politikel *La Dépêche* adalek miz Ebrel 1942. Lenn a reer el levr ne oa ket *La Dépêche* ken “gwazh” ha *Ouest-Eclair*

peurliesañ ha n’en doa Yann Fouere sinet pennad enepyuzev ebet.

Arabat bezañ souezhet kavout en oberenn e-leizh a arroudennoù peogwir eo he fal diskouez ar mennozhioù a veze brudet er c’helaouennoù pemdeziek e Breizh e-pad ar prantad studiet.

Ouzhpenn ar raklavar, pennadoù berr-tre diwar-benn ar gelaouennerien meneget hag ul levr-lennadur “berr”, e kaver 33 chabistr el levr. Abeg ebet da vezañ spontet, n’int ket hir ha savet int evel seurt fichennoù war un tem. Kavet em eus an doare-se sklaer. Gellout a reer lenn pep chabistr hep bezañ lennet ar re all hag e gompren.

P.11 e lavar Georges Cadiou n’eo an istorour na barnar na prokolor. Deuet eo a-benn, da’m soñj, da gaout an emzalc’h istorour-se. Titouroù niverus ha resis a gaver el levr pouezus-mañ. Peadra da vegañ sell pep hini war an istor, ha marteze, da ginnig ur gentel evit an dazont.

HL

**Annaig KERVELLA &
Tudual HUON**

**Annaig KERVELLA &
Tudual HUON**

PROFOÙ _____

Miz C’hwevrer : Jef GEDEZ ; Alain PEIGNE ; Anton FITA-
MANT ; Gérard GILBERT ; Gérard ROLLAND ; Yvon ABIVEN ;
Bernard AUDIC ; Hervé RENAN ; Marie-José ALANOT ; Jean-
Louis BUSSON ; Pierre QUENTEL ; Tangi LOUARN ; Alain
GICQUEL ; Manuel BIANNIC ; Denez PICHON ; Padrig AN
HABASK

— War un dro : 395€

Miz Meurzh : Yann-Fañch KERNEIS ; Pierre LE BAUT ; Jorj BELZ ; Ewan CONNAN ; Marcel TEXIER ; Renée FRAPPIN-KERNOA ; Michel MANAC'H ; Iwan AR FUR ; Luc BIDEL ; Jean-Luc GUINAMANT ; Francis GOHIN

— War un dro : 490€

*Mil drugarez a lavaromp ur wech ouzhpenn
d'hor skoazellerien.*

KENSTRIVADEG HAIKU TAOL KURUN 2023 _____

Da vare gouelioù Taol Kurun Kemperle e vez kinniget ur c'hoñkour haiku. E miz Genver 2023 e oa tem *ar c'harr* : ar c'harr, karr-boutin, karr-Arzhur, karr-nezañ, karr-nij, karr-tan.

488 haiku a zo bet kaset. 134 e brezhoneg, 118 e gallaoueg, 228 e galleg hag 8 e yezhoù all. Meur a rann a zo : skolidi, skolajidi, liseidi ha tud deuet. Hor c'henlabourer Malo Bouëssel du Bourg a zo unan eus izili ar bodad-barn. Setu ar re a zo bet priziet ar bloaz-mañ :

Rummad bugale :

Spontet ar pesked
semplet ar bezhin
an oto er mor
Rozali (skol Diwan Kemperle)

Ar c'harr-boutin skol
c'hoariet e vo kuzh-kuzh
farsus ar veaj
Aloïs (skol Diwan Kemperle)

Rummad krennarded :

Hor c'harr boutin boas
glas barzh 'vel an oabl
pep hini e goumoulenn
Lilwenn Bertin, 6^{vet}

Ar c'harr-samm pounner
o flastrañ kement tra zo
euzhvil didruez
Teilo (6^{vet})

Mont da vakansiñ
eus ar c'harr-nij e weler
ar bed o vervel
Ronan le Bars (3^{de})

Rummad tud deuet :

A c'horreadoù
krignet melezeour ma c'harr
gant kinvi ha man
Gaëlle Maudire, Daoulaz

Wig-wag ar rodoù
yen eo din pa glevan
karrig an Ankoù
Clyde Dlugy Belmont, Lokmelar

Ur c'harr o kantren
e millendall ar gêrbenn
brein e gartenn hent
RJ Kerno

MIZVEZH AN HAIKU _____

Gant gred ha dalc'husted e vez bep bloaz Fanny Chauffin o reiñ lañs d'an haiku da geñver mizvezh ar brezhoneg. Bemdez a-hed miz Meurzh e c'heller kas e/he haiku(ioù) da lec'hienn FEA war Facebook. Roet e vez ur ger bemdez, da silañ en haiku. Etre 10 hag 20 haiker/ez a zo bet bemdez ha tost da 500 haiku eo a zo bet kaset e-kerzh ar miz. Un dudi gwelet penaos e tispak ar stumm japanat-mañ evit krouiñ ha sevel bommoù 3 linenn (5-7-5) en hor yezh.

LEVRIOÙ KOZH, KAZETENNOÙ E BREZHONEG _____

E kreiz-kêr Montroulez e c'heller prenañ levrioù, pladennoù, kazetennoù, skritelloù, bannoù-treset ha paperioù kozh digant Jean-Luc Guinamant, brezhoneger ampart hag-eñ koumanantet da *Al Liamm* evel-just !

*Anv ar stal : LES BOROGOVES
28 straed Ange de GUERNISSAC
29600 Montroulez*

PRIZ DANEVELLOÙ TI AR VRO KEMPER _____

Gant dodenn *an erc'h* eo bet awenet ar skriverien.
Setu roll al loreidi :

Rummad ar re yaouank :

- *Prof an den-tan* – Skol Diwan Kerfeunteun, Kemper

Rummad ar grennarded :

- *Hunvr-erc'hall* – Maiwenn Balem hag Anna an Thoer (Lise Brizeux, Kemper)
- *Droukvallozh ar voulenn-erc'h* – Célia Launay ha Célia Selaminec (Lise Brizeux, Kemper)
- *Ur sizhun e ti mamm gozh* – Maelenn Simon Fablet (Skolaj Kastell-Paol)

Rummad an dud gour :

- *Erc'h war ar menez-tan* – Paskal Hervio
- *Bro guzh ma zu du* – Cherm ar Bloaz
- *Erc'h war ar menez* – Mark Kerrain

CHOMADENN E ROC'H-GORED _____

D'ar 25 a viz Meurzh e oa bet kouviet Loeiza an Duigou hag Anna Duval-Guennoc gant *Al Liamm* ha skipailh IPPA evit lidañ donedigezh o romant *Tan de'i* war marc'had al levrioù brezhonek, un istor bet ijinet e Roc'h-Gored, bloaz zo bremañ.

Diwar atiz Jerom Olivry e oa bet roet lañs d'ar chomadenn arzourien gentañ e brezhoneg penn-da-benn e miz C'hwevrer 2022. Annaig Kervella eo a oa aet e darempred gant an div arzourez hag o doa asantet diouzhtu ar raktres.

Peadra zo da gaout un tamm lorc'h rak ul labour hir ha tenn eo bet, an disoc'h avat a zo eus ar re wellañ ha sur mat e vo plijet al lennerien yaouank gant an istor boemus itriket gant Loeiza ha gant tresadennoù kaer Anna.

Un degemer c'hwek a zo bet graet d'an div arzourez ha d'hor skipailh gant tud an IPPA e-karg eus an tour-tan. Deuet e oa Anna gant an tresadennoù orin bet aozet ganti, an holl anezho eus ar re gaerañ ha sinañ meur a levr o deus graet an div blac'h ivez. Displeget o deus e brezhoneg hag e galleg penaos o doa labourer pa oant war an enezennig ha peseurt labour o deus ranket kas da benn ur wech echu ar chomadenn a oa padet ouzhpenn div sizhun memes tra.

Ur banne a enor, krampouezh ha kouignoù a oa bet kinniget gant skipailh an IPPA ha kuit an dud goude forzhik marvailhoù a-raok ma teufe ar mor da c'hronnañ an enezennig evel ma ra bemdez.

Emichañs e c'hello *Al Liamm* aozañ ur chomadenn all a-benn bloaz gant skrivagnerien/skrivagnerezed all, ken entanet ha Loeiza hag Anna a rankomp trugarekaat a wir galon evit bezañ asantet d'hor c'hinnig hep termal na bout spontet betek re !



©Tudual Huon

LENN A-STROLL EN ORIENT

Ur c'hlub lenn, « Lenn a-stroll », a zo en Oriant a-c'houde un ugent vlez bennak, muioc'h moarhat, met er penn-kentañ e oa mesket get « Emgav er vrezhonegerion », un tolpe hag a veze gozik bep miz, setu n'eo ket kaer gouiet met ur bern skrivagnerion o deus bet tro da zonet a-hed ar blezioù, pedet get *Emglev Bro an Oriant* : Gérard Gwenn, Mich Beyer, Pierre-Emmanuel Marais, David ar Gall, Riwal Huon, Herve ar Gall, Yann-Fulup Dupuy, Erwan Hupel, Yann Gwilhamot hag ur bochad re 'rall c'hoazh, re hir eo al listennad anezhe evit bout lakaet amañ.

Ar blez-mañ (da-heul ar blezad-skol e-kerzh an traoù) e oa daet Talig Audran da eskemm diâr-benn levr he gwaz Yannig : *Kan ar mel*, àr-un-dro get o merc'h Maina. D'ar Sadorn 5 a viz Du 2022 e oa, er site Allende. Dalc'hmat e vez an emgavioù eno, ha dalc'hmat d'ar Sadorn e penn-kentañ an enderv.

Un amzer zo bet ma veze troet un tammig muioc'h, monet da Widel, Lokmikaelig, Henbont, Lannarstêr, Plañvour, Porzh-Loeiz met a-benn ar fin e oa bet kavet aesoc'h bout bepred er memes lec'h. Edan berr e vo ret deomp cheñch en-dro, rak dilojet e vo an Emglev, èl holl gevredigezhioù ar Site Allende.

D'an 11 a viz Meurzh 2023 e oa bet degemeret Jorj-Abherve-Gwegen evit e levr *Morlenn*, ha d'ar 17 a viz Mezheven e tay Yann-Charlez Kaodal da gomz a-zivout e romant *Fulenn*. Bep taol e vez un ugent bennak a dud, gwezhave muioc'h, ha bep taol e vez plijus an eskemmoù. Unanig bennak a za gwezhave get ar levr en e zorn hep bout bet kemeret amzer d'er lenn, met ne vern, komz get ar skrivagnour pe ar skrivagnourez a zegas kalon da grog e-barzh !

Daou zen a zo e penn « Lenn a-stroll » : Jean-Marc Ilias ha Michèle Pinvidig, gete e vez pedet an dud, ha graet àr-dro pep tra, betek ar banne goude an diviz, rak n'heller ket evit disparti èl-se, hag en-dro d'ar banne ha d'ar c'hatev e talc'h bepred an eskemmoù get an dud pedet.

Un dra arall a vez graet en Oriant : *Emgav ar Vrezhonegerion* (doare 2, sizhuniek !) evit kavout an tu da lâret kaer e brezhoneg. Bep Merc'her da 6 eur hanter en em dolve ar re a faot dezhe er

Galway Inn, ur pub brudet-bras en Oriant. N'eus na tem na den evit kas an abadenn d'un tu pe d'an tu 'rall : digor eo ar gomz d'an holl, ha gelllet a raer zoken gober eno ur meni-koan get krampouezh ha boued buan sort-se.

Daniel Doujet

PRIZIOÙ DAZONT AR BREZHONEG _____

D'ar Gwener 31 a viz Meurzh e oa bet lidet Prizioù Dazont ar Brezhoneg en Opera Roazhon, ul lec'h brav-meurbet ma oa bodet war-dro 300 den. Lusket e oa an abadenn gant ar strollad Youn Kamm Trei(z)h, a oa aet ar maout gante e 2022.

Kevredigezh :

1. Bannoù-Heol evit bezañ embannet *Ar marc'h dall*.
2. Kevre breizhat ar vell-droad ouezelek evit brudañ ar vell-droad ouezelek e brezhoneg.
3. les chats cosmiques evit ar c'hoari lizherennoù *Brezhle*.

Levr faltazi :

1. *Kan ar Mel*, gant Yannig Audran (Al Liamm).
2. *Fulenn*, gant Yann-Charlez Kaodal (Al Liamm).
3. *Planedenn paotr e bluenn*, gant Mich Beyer (An Alarc'h).

Strollegezh :

1. Plougastell-Daoulaz evit bezañ diorroet ar c'helenn brezhonek ha bezañ sinet ar garta *Ya d'ar Brezhoneg*, live 3.
2. Rostrenn evit bezañ lakaet ar brezhoneg war wel er gumun ha bezañ tutet brezhonegerien e servijoù ar gumun.
3. Pempoull evit bezañ diorroet ar c'helenn brezhonek ha bezañ sinet ar garta *Ya d'ar Brezhoneg*, live 2.

Oberenn gleweled :

1. *E jardrin ur stourmer*, sevenet gant Mikael Baudu (France 3 Breizh).
2. *Disoñjal*, sevenet gant Madeleine Guillo (All in one Production, Abordage Films).
3. *Buhez ar sent*, sevenet gant Riwal Kermarrec ha Yann-Herle Gourves (France 3 Breizh).

Embregerezh :

1. Breizh Odisea, ul lec'h sevenadurel e Landevenneg hag a zo bet troet e lec'hienn internet e brezhoneg.
2. Ouest-France, evit bezañ lañset un heuliad podkastoù e brezhoneg, anvet « Eus ur remziad d'egile ».
3. Skol vroderezh Pascal Jaouen, evit an dibunadeg *A-Galon* hag ar c'hentelioù brezhoneg aozet evit implijidi an embregerezh.

Oberenn kanet e brezhoneg :

1. Elodie Jaffre, Awena Lucas, Yann Le Bozec evit *Kanour an noz* (Coop Breizh).
2. Modkozmik, evit *Volume 1* (embroduet).
3. Startijenn, evit *Talm ur galon* (Paker Prod).

Brezhoneger.ez ar bloaz :

1. Alvan hag Ahez, evit bezañ kanet e brezhoneg en Eurovision.
2. Jean-Patern Ars, evit bezañ oberiant war ar c'helenn e brezhoneg e Noal-Muzilheg hag e bed ar c'hoariva.
3. Loeiza an Duigou, evit bezañ ur skrivagnerez yaouank e brezhoneg.